



« Ar Maout » rummad ar vugale kentañ derez 2025

Gouelanig Cossec

Penaos kregiñ ...An enseller Lanig Cossec on, lesañvet ar « gouelan » peogwir on bet ganet gant ur wenaenn ruz war ma fri hag e vezan gwisket atav e gwenn ha du.

Ar sizhun paseet, diouzh noz, ez eus bet laeret ur 15 kouign-amann bennak hag ur stok bras a voutailhadoù Breizh Kola e Karrefour Market Ploveur. Ur wech kelaouet gant rener ar gourmarc'had, on bet war-eeun war lec'h an torfed.

Du-hont e oa Maria, ar gefiourez, Soazig Le Bars, ur bratikez ha Roger Garrec, martolod e Keriti.

An testoù-mañ o doa gwelet pe kavet traoù iskis hag a oa sañset sikour ac'hanon. E rann evajoù ar stal he doa kavet Maria ur boned gwer hag a denne eus stumm re ar goriganed.

Paotr ar mor, Roger Garrec en doa merzhet ur bern gouelini o tebriñ bruzun kouign amann war ar porzh. Sachet e oa bet evezh ar martolod gant trouz al laboused a seblante bezañ sot gant ar boued-se.

Hag an trede tra : ur bern boutailhadoù Breizh Kola goullto a oa bet kavet gant Soazig Le Bars tro-dro da beulvanioù Kerfland pa oa hi o pourmen gant he c'hi.

Pep tra a gase ac'hanon war-zu ar goriganed.

Re anat e oa, re !

An holl a ouie e oa sot an dud bihan gant evajoù ha boued dous. An holl a ouie e raent bep sadorn ur rave-party nepell douzh lec'hioù kozh ar vro : Beg an Dorchenn, Beuzeg, Feunteun Sant Kom, Maner Kerbulig hag all hag all...

Divizout a ran kregiñ ma enklask gant Maner Kerbulig ken kas e vefe roudoù du-hont. Degouezhet war al lec'h, e-kichen ar puñs e kavan un dikedenn « kouign-amann ». Ma !

Pleget a-us d'ar puñs e tamwelan ur c'hartoñsad boutailhadoù Breizh Kola.

Neuze e chom un dra d'ober : Kavout unan bennak hag a zo o chom nepell diouzh ar maner.

Tri zi a oa : Hini Mark d'Arvor, hini Pierig Le Labous hag hini Jeanette Brestois.

Mont a ran e ti Jeanette Brestois, he zi zo stag ouzh moger ar maner. Peder eur eo, emichañs em bo droad ur banne kafe ganti...

Digeriñ an nor a ra Jeanette ha souezhet bras eo o welet ac'hanon.

« -O, ma ! Piv zo aze ? Lanig Cossec ! Pell zo n'em boa ket gwelet da wenaenn ruz !

Penaos emañ an traoù gant da vamm ? N'eo ket marv c'hoazh ?

- Nann, ta ! Ur banne kafe hag un tamm-kouign-amann a vefe eviton, mar plij ?

- Ur banne kafe ma fell dit met kouign-amann n'az po ket ! N'on ket evit gouzañv gluten.

Dal, kouignoù sec'h hag ur banne kafe evidout ! »

« Ec'h » m'eus graet ur wech tañvaet un evaj a oa sañset bezañ kafe : ur meskaj rum ha chikore a oa !

Lonket 'm eus memestra ar banne evit lakaat ar gwastilli da ziskenn em gurlanchenn ken sec'h e oant.

Poent eo din mont kuit bremañ, n'eo ket Jeanette an hini kablus, ma ne c'houzañv ket ar sukr.

« - Ken ar c'hentañ Jeanette !

-Deus en-dro p'az po c'hoant ! Bez e vo atav ur banne kafe evidout !

-Gant plijadur, Jeanette...a respontan dezhi en ur soñjal ar c'hontrol, gant ar c'hoant dislonkañ.

Diwezatoc'h en em gavan dirak ti Mark d'Arvor. Anavezout a ran anezhañ : Hemañ a oa martolod gant ma zad hag o deus labouret asambles war « War-raok » ur vag eus Ar Guil.

Skeiñ a ran ouzh an nor hag e klevan : « Deus-tre ! »

Mont a ran tre en ti hag e welan Mark er saloñs o lenn an Ouest France e-barzh ...ur gador-ruilh. Sabatuet on ! Mark a zispleg din en deus kollet e c'ar en ur gwallzarvoud oto daou vloaz zo. Bevañ a ra gant e wreg hag en deus ezhomm sikour ur glañvdiourez teir gwech an deiz.

Neuze, n'eo ket Mark d'Arvor an hini kablus peogwir ne c'hell ket mont betek ar maner e-unan.

Mont a ran kuit en ur soñjal ne chom ken met un ti e-kichen ar maner a-raok mont da furchal en ul lec'h all.

Pierrig Le Labous a vev e-barzh un ti bihan en tu all deus ti Jeanette Brestois.

Kavout a ran anezhañ e-barzh e garrdi. N'en deus ket gwelet ac'hanon hag e werzhan-me eo tort an den.

« -A kaoc'h ! Pelec'h am eus lakaet ma e-zoug ? a huch eñ a-raok gwelout

ne oa ket e-unan. Piv oc'h ? a c'houlenn diganin war un ton displijus-tre.

- Lanig Coosec, enseller polis. C'hoant am eus gouzout hag-eñ n'ho peus ket merzhet un dra bennak iskis er mare-mañ tro-dro d'ar maner. Ul laeroñsi zo bet e Karrefour Ploveur ar sizhun paseet. Hag evit poent pep tra a gas ac'hanon war-zu ar gorriganed. Setu perak e ran tro al lec'hioù a blij d'an dud bihan. Me zo klask war-lerc'h testoù.

- Ha ya ! Sur e plij dezho al lec'h-mañ ! Bep sadorn e reont un trouz spontus o kanañ ha dañsal betek div eur noz. Skuizh-on ganto !

Meur a wech on bet betek an archerdi o klemm diwarno. Met netra d'ober ! Ne cheñch netra !»

Fuloret eo ar paotr.

« -Ha morse n'oc'h bet o welout anezho ?

-Bet on ur wech nemetken. Goap ouzhin o deus graet.

-Digarezit ac'hanon met ret eo din debriñ un dra bennak peogwir on diabetek. Ha chomet eo ma zamm sukr e-barzh ma oto. Un tamm kouign-amann a vefe ganeoc'h ? Pe ur banne Breizh kola ?

- Kouign-amann m'eus ket, met Breizh Kola a zo. Gortozit un tamm, mont a ran da gerc'hat ur voutailhad. »

Mont a ra kuit ar paotr. Profitañ a ran evit furchal un tamm er c'harri. Mont a ran er maez hag e welan Pierig o vont etrezek ar puñs. Heuliañ a ran anezhañ.

O klask kemer ur voutailhad Breizh Kola gant sailh ar puñs emañ.

« - Iskis eo lakaet ar voutailhadoù e-barzh ur puñs, n'eo ket ? A lavaran dezhañ. N'eo ket alies e vez gwelet seurt boaz b'ar vro. Ouzhpenn kement a gartoñsadoù !!!

N'eo ket ar stok a zo bet laeret e Karrefour Ploveur ? »

A daol-trum en em lak ar paotr da lenvañ.

« - Gwir eo. Me an hini eo en deus laeret ar c'houignoù hag ar Breizh Kola. C'hoant em boa en em veñjiñ eus ar gorriganed. Gwelet ho peus ma zort ? Ar wech on bet o welet al lamponed-se evit goulenn diganto paouez gant an trouz, o deus lavaret din : « Paouez a rimp gant an trouz ma teuez da dañsal ha da ganañ ganeomp. Ezhomm hon eus sikour evit echuiñ ur ganaouenn. »

Ha nac'het m'eus ober se. Me, n'ouzon ar mod da ganan.

Neuze o deus lakaet din an tort war ma c'hein. »

Kaset am eus ar paotr ganin betek an archerdi. Ret e vo dezhañ resteuler ar pezh en deus laeret ha mat pell zo. Paourkezh paotr ! Arabat kabluasaat an den betek re.

Ur wech ouzhpenn, me, Lanig Cossec, gouelan finañ ar vro vigoudenn, on deuet a-benn eus al laeroñsi-mañ !

Poent eo din kaout vakañsoù ! Met a-raok mont da evañ ur banne kafe e ti Jeannette Brestois !

Kas a rin kafe malet ganin evel-just...

